

'Barzh un ti-Korn war Venez-Bre ☺

buanao'h

'Barzh un ti-Korn war Venez Bre, Tra la lala lala lala la
 lantoc'h adarre
 la, 'Barzh un ti-Korn war Venez Bre, 'M eus choazet
 un vestrez ne-ve.

'Barzh un ti-korn war Venez Bre,
 Tra lalala lalalalale,
 'Barzh un ti-korn war Venez Bre,
 'M eus choazet ur vestrez neve.

Un dousig koant d'am fantazi,
 P'am bos foeltr hini nemeti.

- Debonjour, ma dousig minorez,
 Setu me deut d'ober al lez.

D'ober al lez ha d'ho koulenn
 Digant ho mamm, ho kwir berc'henn.

- Penaes e timezfomp hon daou
 Penegwir 'm eump ket a vado,

Penegwir 'm eump na ti nag ôz
 Na gwels da gousket en noz.

- Evel ar gwenan a refomp :
 N'o devez mann pe gomansont,

Nemet gras Doue hag o zi
 Ni 'm omp ive, ma dous Mari.

Evel ar gwenan a refomp
 E-touez ar raden e kouskfomp.

Deus a vihan ec'h efomp da vras,
 A-benn ar fin ni vo kalz. (1)

(1) Kalaz = kalz.

- Me 'soñje din pa dimejen,
Netra en douar ne rajen.

Nemet kanañ ha terriñ kraou
Ha gwelc'hiñ ma daou zorn o-daou.

- An dud yaouank pa dimezont
N'ouzont ket petra 'reont.

An dud yaouank a soñj gante
E kouezh an acur a veg ar gwez,

E kouezh an acur a veg ar gwez
'C'h eo 'n delioù melen eo a vez,

'C'h eo an delioù melen eo a vez
Evit reiñ plas d'ar re nevez.

An dud yaouank pa dimejent
Furmñ ur jardin a dlejent,

Ha pentañ enni tri seurt plant,
Chagrin, melkoni ha tourmant,

Ha louzaouenn ar basianted
Ha mont alies d'he gwelet.

oooooooo

Dastumet e Ploubêr d'an 18
a viz gouere 1952.

Sell. Sonioù Breiz Izel, levrenn
2, pajenn 20